



CHANSON NEVEZ

Var sujet eun discusion entre PER a PAUL

EVIT AR GOUARNAMANT

En mis Mai er bloavez 1892.

Pa meus eun tam amzer e han d'en occupi
D'ober eur chamson Nevez vit enem amuzi
Gout a ouzon ar sujet demeus va hanaouen
Na vo ket da hout an oll e mesq ar Francisien.

Abalamour a mens c'hoant eun tamic da barlant
Demeus ar politic ac ar gouarnamant
Daou vla varnuguen zo aboue ema er Frans
A Republic o ren gant cals a buissans.

Ar vestres Mari Anna evelt ma zeo hanvet
E deus laket bars er Frans cales a vleo toret
Ar jalousi deus laket enon tones Francisien
Ar pez a ziskues scler gallont ar fumelen.

Honnez a ra ivez velt d'ar merc'het fier
Seul vui er joulous anei a zav e fen en er
Bremen ma ene brud a leun a buissans
E bars e ne fauteuil gouarnourez e Frans.

Ac a nep e diblasso certen a vo goas mad
A hoas a renco ober memes meur a grogad
Rac e gallont a zo bras mignonet deus ive
Cals tud deus er surveil couls enoz ac en de.

Evit Mari Anna hervez ma zantimant
A deus eur galon vad ac eur speret contant
A garfe guelet an oll ebars an eurustet
Couscoudet ebars er Frans gant lod ei mepriset.

Lod a lavar memes na ne ket kristenez
A na zezir ober nemet fa agriez
Lod all a lavar ivez eo gleet e meuli
A dont da renta dezi enor bars en pep ti.

PER

Matreze o peus c'hoant memes da lavaret
En plas an Autrou Doue a gle be adoret
Pe autramant renta dei ebars en oll broyou
Mui enor vit dar vere'hes Rouanez a envou.

PAUL

Sonjit mad va mignon aroc enem avans
Me zo o parlant bremen deus gouarnamant Franz
Lezomp gant beleyen a religiuset
An traou celestiel a zo de da brezec.

PER

An oll dud a illis a zo breman nec'het
A renk sonjal mad eur goms aroc e lavaret
Mar ve gallet o lacad tout bars er prisoniou
Na vent ket lest da brezec ebars an illizou

PAUL

Na meus ket bet clevet zo difenet james
Da velec a bet coms deus ar zilvidigues
Non pas deus politic vels zo lod o hober
Pep hini ene stad dle ober e zevel

PER

Oblijet int ives dont den em occupi
Demeus ar nez a basse evit on instrui
A da velet pe lec'h a zo mad couls a fal
Evit explic an danger lec'h eo just dom dioual

PAUL

Mor deo evit Doue a lakefent o foan
G adversourien neuze a vize bet bihan
Mes er hontrol a gredan n'hani gante
Mui a zonzont er chair vad a da zestom danvez

PER

Ne ket vit destum danvez na chair vad int troet
Mes nint ket evit beva mar na vent ket peet
Gant ar pez o deuz re a reont aluzen
Evit creski ar faiz a sicour ar beorien

PAUL

Mar zo eur sort beleyen nint ket stanc er vro ma
Larfent ket memes eur bater d'eur paour vit netra
Penos e rafent arc'hant dezo vit aluzen
Deus ket memes ar gourach da lart eun oferen

PER

A republic no henver ne ket re vad ive
Pa lakeont anezo da ober o honge
Clask an tu do distroï deus o vocation
An dra ze a zo c'hoant col ar religion

PAUL

Ebars en amzer goz oa er religion
Beleyen a re al ep tam vocation
Balamour a oa seanvoc'h douguen ar zeyo du
Vit ar zac'h ac an armo a guisqu'ar bragou ru

PER

Eur belec va mignon ne ket e lachete
A ra poan speret dezan o honet dan arme
Mes ar goal skuer a zo etonez ar zoudardet
A ra dezo distroï kemer speret ar bet

PAUL

A republic var goementese na ma ket da damal
Guel eo cavet eur belec mad evit na ze dec fal
Lec'h o devez braman d'ober reflexion
Non pas mont da veleyen mes gant vocation

PER

Non ket vit contesti re. var sujet kementse
Servichourien calonec hou! an Aotrou Doue
A pa zeuan da zonzal ebars er brezelou
Mar na ve ket combate neus ket o victoriou

PAUL

A republic zo breman deus ket d'each difennet
Ober o religion ar mod a zezirfet
Receo ar zacramanchou menet dan oferen
Lest guanomp on liberte pep houï heuil e ben

PER

Clevet a meus ivez eur c'helou ne ket mat
A zo c'hoant do separi breman deus an etat
Ar poent ze a gredon a zo leac'h da damal
Mar na garomp tol evez ezei an traou da fal.

PAUL

Cals micherourien a zo evelt din va hunan
Evit gonit or bara ni or bens cals a boan
A renez a zo peet gant ar gouarnamant
Contant c'hoas da ramas tout pezh en deus or paysant.

PER

Na forsont ket a c'hanomp da rei dezo netra
Mar rei ket de labourat na vech' kuit da bea
Pedennou, Oferennou mar peus c'hoant da laret
A zo just deoc'h pea mar peus eun tam speret.

PAUL

Me a zo badezet ivez kerkouls a c'houi
Garfen ket goud'ar maro belezet velt eur c'hi
Mes mar fot dam zod lacat goene eun tam peden
A vo ret de foura an dorn re donn er voujeden.

PER

A nep en deus arc'hant a lacayo pedi
Ac an hini neu deus ket e renk nem gonsoli
A lacat o fiars en madelez Doue
Na momp ket tout er bet man evit cavet danve.

PAUL

Ar pedennou a lerer zo caer dirac Doue
Vit delivrans an eneou ze et deus ar bet me
Deus plujadur ar penvidic, yelo deustu dor joa
Ar paour kez guinou digor na no james netra!

PER

Doue a recompans an dud paour ive
A bartaj an oberou mad, hervez e volonte
Arabat eo james coueza en dizesper
Rac breudeur ezomp oll bugale d'or Zalver.

PAUL

Mar ezomp oll breudeur e klefemp nem glevet
Bea henvel deus on tad tout republicanet
Jesus a oa republican pa oa bars er bet man
Breman cals a veleyen a vot e nep dez an.

PER

Lezomp ar veleyen eun tamic a goste
A deut guenen dre ar Francs eun droyat da vale
Houï veio ar republiche testom ivez arc'hant
Mui evit ar veleyen a revin ar paysant.

PAUL

Danvez a republic n'oun ket pe leac'h ema
Ar pezh a zespunont a ouzont implija
En servich a re baour couls ac ar pinvidic
Ar guir garantez a vrendeur a zalh ar republic.

PER

O implija a reont an draze a zo scler
Mes abuz o deus gret a hed an oll amser
Guelit tier scol savet partout er c'hampagnou
A kement all a dut velt a zo er c'hargou.

PAUL

Ar scoulachou a dra zur na blich ket dan noblans
Defot guelet ar paysant bepred en ignorans
Rac n'ellont mui o zreti velt dan amser passed
A kement ze a ra de cals a boam speret.

PER

A re benvidic breman bez divar o danve
Da ziski ar re baour savantoc'h evite
Danvez a discadurez a dle nem heuil bepred
Ar re baour da labourat evit gonit o boed.

PAUL

Pardonit din va mignon ma lavar franchamant
Mar n'en doc'h ket eun den fal ezoc'h eun ignorant
Houï garfe ober dar paour goassoc'h vit dar lonet
Discadurez a danvez deuz a dout be privet.

PER

Labourat an douar eo dever ar paysant
Ac evit ober ze ne ket ret bet savant
Mes breman mar plij goneoc'h eur vech arc'honge gret
Discadurez a meus, ne fot din bea placet.

PAUL

Cals a c'houlen enit guir a cals a ve placet
Ken a ve ezom ane na vent ket kemeret
Credet memes eo mad zo cals a c'houlenno
Pa vank unan de zever eun all e remplasso

PER

Formet a zo ivez cals ablasso neve
Oa ket ezom a gredan eun anter aneze
Guelet a ran daou facteur o ramplasi unan
Tout kement zo er c'hargou esperer de o foan.

PAUL

Chomit en kichen o tan pe no kuele cousket
Na peus mes skriv eur lizer a rei o tri guennec
Ac a vo transportet d'oc'h en pevar chorn ar bet
Demeus a vo an adress en leac'h a zezirfet.

PER

Gout a ouzon kementse a zo eun aizamant
Mes re a dut zo placet gant ar gouarnamant
Nac evize neubentoc'h e partiche ma lizer
Ac ar respont memes tra a vize deut dar guer.

PAUL

Digorit o taou lagat a c'houi a velo scler
Peguement a chanchamant a zo enon amzer
Breman zo correspondans etousq ar Francisien
Lec'h unan en amzer goz breman zo daou uguen

PER

Ar c'horrespondansou vit guir a zo cresket
Balomour a zo er Frans cals re a dut desket
Tout paour a penvidic a len ar journalou
Neus ket mui a zifferans ebars enor meskou.

PAUL

Cetu aze va mignon dever ar gristenien
Beza bepred generus evit enem zouten
Eur nombr bras eus a c'hanoc'h a oar mad o dever
Mes ne ket a oaloc'h goude ret ezeo en ober.

PER

Fier ezeo ivez breman ar baysantet
Pa recevont eur lizer ractal o digoret
A lennet a vo deustu ebars eneun tol cont
A den a ouyo netra capab int da respont.

PAUL

Houi etrezoc'h an noblans peus ket kalonou mad
Et zezir tout oc'hunan evelt an dut ingrad
Hoas o peuz c'hoant lavaret oc'h henvel eus ar zent
Ya demeure a re a ouask ac a grog gant o dent.

PER

Arabat eo doc'h facha vit ze va mignon ker
A deut guenen eun droyat da velt ar c'hantonnier
Oc'h abuzi e amze duze e coste an hent
A surtout mar de cousket grogo ket gant e zent.

PAUL

Mar vident bepred cousket no pize ket henchou
Ker braou velt o peus breman da roul'o coueturion
No pize ket gallet mont evelt breman e rout
Huial a velociped er guer echom fac'h tout.

PER

Lavarit din camarad dre ma zoc'h eur pot fin
Demeus a be seurt costez a teu mein en jardin
Me a zo en danger da chom ep troi varc'hrampoen
Mont dar brezel ep armou ne ket eaz nem zifen.

PAUL

Mont dar brezel ep armou chom ep troi eur grampoen
Daoust piou a gomprenfe ar sort latinerien
Mar doc'h eur guir Français eon den demeure ar vro
Comzit din franchamant a me o responto.

PER

Kentoc'h evit o facha me zero ma guinou
Couskoude zo cals traou var bord ma muzellou
Mes impoli a gavan dislavaret eun den
Peus nemet continui me responto amen

PAUL

Cetu aman an noblans bars eneur zac'h paket
Ebars er memes hini glefent tout be laket
Deut er mes demeure ar zac'h me o tisamaro
A commansomp a nevez da explic or homzo

PER

Mar deo ret din parlant me a ya da gomans
E neur lavaret hardi zo injustis er Frans
Peguement guirion bep bloa bean devar ma flas
Evit kement tra a meus memes evit ma chass

PAUL

Houi sonje d'oc'h camarad cavet oc hezamant
Ep memes versi netra vit ar gouarnamant
A re a zo er c'hargou vent ket peet gant prun
Ac or breudeur, soudardet nint ket bemdez vit yun

PER

Me zo sur e pean ouspen mil lur ar bla
Ac evit kement ze tout na recevan netra
En amzer ancien na oa ket ar mod ze
Ne oa cousimant netra da beo vit ar leve

PAUL

Me a garje camarad vize ret din pea
Evelt o peus laret din entro mil lur ar bla
Mar peus c'hoant ni chancho vit o renta contant
Me ran met eur scouet ar blat vit ar gouarnamant

PER

Impossib eo deoc'h rei mar peus ket a zanve
Mes an hini en deus a zo flemet gante
Bep bla a gresk ar som evidomp da bea
Dar fin e lipefont tout a ni na bo netra

PAUL

Baoue ma ar republic o ren bars er vro ma
Na neus paoured den a bet mar neus c'hoant da boania
Ar c'homersou a zo mad an traou zo manific
Enor eta dar Frans (Vive la Republic)

PER

Inutil ez eo din contesti a velan
Ar rezon a lezer bepred gant zota
Cals traou a larfen c'hoas mar mize bet amzer
Mes guel eo din partial a mont breman dar guer

PAUL

Cals traou a leveret a zo c'hoas bars er gont
Na peus kin nemet goulen me zo prest dp respont
Ar rezon a lavaret a zo vit ar zota
zo sotoc'h evidoc'h a zo poënt e staga

A nep en deus rimet an disput a neve
A oa eno presant o silaou aneze
Evit hini anezo neus ket eun tam egard
Nen deus gret met o c'hlevet couskoude zeo (Bouard).

A hervez e zantimant eo memes eun dra vad
Bars e nor bro evelt breman caouet eun tam combat
Rac mar vizemp bet troët tout er memes coste
Matreze yafe falloc'h an traou evit breme

C. B.

— FIN —

GUILLEBMIC.

(Tout droit réservé)

